

Ar C'hleuz Alaouret

Hag an tour Dantelezet

Var eun ton Galec.

Er Finistèr e zoun bet ganet,
He Castel-Paol eo man va brò ;
Ar vro güella a ouffet cavet,
Ha caera Tour zo tro vardro.
Me o c'harie, me o admire,
Qenlies deiz ro Doue, me lavare :
Me gar va C'hleuz alaouret,
Va Zour dantelezet.

Mes, pa voe rentet din ar c'hélou
E zoa ret quitted va mestrez ;
Ha mont da heuill an labourinou,
Dilezel tad ha tieguez,
Me meus changet ha lavaret :
Oh ! n'antàn qet, n'antàn qet, n'antàn qet...
Güell eo va C'hleuz alaouret,
Va Zour dantelezet.

Hac e vijen-me en em fachel ?
Senti d'an urz me a ranqe.
Tud mechant a ré scouarn calet
Oc'h va daélou, va c'hlemou-me,
Hac e c'hoarzet, e voa paet,
O lavaret : Yvonie ? n'antàn qet !
Adieu va C'hleuz alaouret.
Va Zour dantelezet.

En déspeit din-me, er rejimant,
En exerciç, Yvonie paour !
N'em boa na gout nac ententament
D'anaout james *droite, demi-tour* ;
Hac e troen evel ma sonjen,
Dre ma troen, gant anqen e clasqen
Güelet va C'hleuz alaouret,
Va Zour dantelezet.

Diouc'h ar gamel tam ne brofiten, !
Trend, qen a güezen eus va za,
O vont varlerc'h ar c'horf me chomme
Bep cant bas d'en em discuiza
Hac e voelen, dre ma sonjen
Marteze qen birviquen ne veljen,
Siouas ! va c'hleuz alaouret,
Va Zour dantelezet !

« D'ar paotr-mâ neus nemet eur remed,
(Eme'n doctor) : eur c'honje mad ;
« Güelit-en... entrezec ar véred
« E qerz ar c'heas paour timad.
« Ha great e voe var ar guer-ze
« Dal da gonje quea d'ar guer alesse
« Da gaout da Gleuz alaouret,
« Da Dour dantelezet. »

O va brò gueaz ! ô brò beniguet !
Cetu me distro en ho creiz !!!...
Ra vezo da vijen miliguet
Ar re am c'hasfe deus va Breiz !
O va Zad paour ! ô va Mam guez !
O Jantonie, va anter-tieguez !
Gloar d'hor C'hleuziou alaouret !
D'ho Tour dantelezet !

Bremàn cetu me em zieguez,
Gant Jantonie, va greguic coant ;
Eur greguic douç, leun a vadelez :
A ra pep tra hervez he c'hoant.
Beza hor bo bugaligon
A vezo coantic evel æligon.
O va C'hleuziou alaouret !
O Tour dantelezet !

Hac en zo boneur pâr d'am hini ?
Nan m'en assur, a dra certen :
Ne meus mui aoun deus an ennemi,
Ha n'em bezo tanfoultr biquen,
N'eus general, na corporal
A ell güelet eveldon-me ractal
Qer caër C'hleuziou alaouret,
Na Tour dantelezet.

C'houi, soudardet va regimant,
Qersit oll d'ar victor atao ;
Pepini en deus e zantiman ;
M'en em gar gant Jantonie brao.
C'houi a redo pell dre bep brò,
Ha me chommo amàn bête 'rmaro,
Gant va C'hleuziou alaouret,
Va Zour dantelezet.

Mes mar teufe biquen ar Zaozon
Da attacki va brò qer Breiz,
Eleal neuze, en güir Breton,
Mê en tou amàn var va feiz,
Qerqent e ven güir tor e ben,
Gant va Jantonie, hon daou o tifen
Hor C'hleuziou ker alaouret,
Hon Tour dantelezet.

Eun deiz, pa éruo an termen
Ma vezo ret renta ar gont,
Dirac treid ar Barner Souveren,
Me gred n'em bezo qet a spont :
Me meus bepret an oll caret,
Ha va Jantonie ha me admiret
Hor C'hleuziou caër alaouret,
Hon Tour dantelezet.